

## SON AN IVINEN

Ar chouec'hved eus a viz goueren, Mil eiz kant  
 tri ha daou - u - gent, Eur c'holl bras a zo ar - ru -  
 et, Gwe-lan a ran ouz hen la - ret! Eun ti - ad  
 kbras hag o - no - rus 'Zo la - ket 'neur stad  
 ieu - e - zus.

Ma flijadur a zo achiu,  
 Pelloc'h tol kaer ne welin mu,  
 Ma c'halonig a zo manret,  
 Pa zonjan 'n ivinen troc'het ;  
 Mervel a ran gant au anken...  
 Kenavo evit birviken ! »

Gant ar c'hlog ru hag ar c'hlog gwenn  
 Eo het zavet ar ganaouen,  
 Gant ar yer goz eo bet skrivet,  
 Gant ar polizi vo kanet,  
 Hag evelse e vo miret,  
 Souj an ivinen viuniget.

« Hag.e kontfen parzek real,  
 Evit sevel d'imp eur c'hlud-all,  
 Biken ne vemp ken kaer kludet  
 'Vel en ivinen vinniget !  
 Bihan ha bras, koz ha yaouank,  
 Pep hiui an evoa e vranks.

— O ya ! kentoc'h, 'me ar c'hog ru  
 E chancho an avel a du,  
 'Vit ne c'houzanvfen me biken  
 E ve diskaret ma gween ;  
 Rak me anve al lezenno.  
 Kenkoulz ba mab dimeus ar vro.

« Eur fallagriez a va groet,  
 Ma ve 'n ivinen diskaret ;  
 Ar bed, sionaz, a zo karget,  
 A dud fall hag interestet ;  
 Hag e wefen koll ma c'hriven,  
 Me a reuko heuilh al lezen ! »

Mont ra ar c'hog, a gammad vad,  
 Da c'houli ali an advokad,  
 Mes 'warben mac'h eo distroet,  
 An ivinen 'zo diskaret,  
 Ha setu ar c'hog daoubennet,  
 Hag e oll diad glac'haret.

Ar chouec'hved eus a viz goueren,  
 Mil eiz kant tri ha daou-ugent,  
 Eur c'holl bras a zo arruet,  
 (Gouelan a ran ouz hen laret !)  
 Eun tiad bras hag enorus  
 'Zo laket 'neur stad truezus.

Aboue tri c'chant vla, marteze,  
 Holl yer ar bourk, a re da re,  
 A glude en ivinen vras.  
 'Uz d'ar vered ha tost d'ar groaz,  
 Biskoaz n'o devoa meritet  
 Bean eus ar ouenn digludet.

Kerkent ha ma savas ar vrud  
 E vije diskaret ar c'hlud,  
 En em dastumas ar c'hlud,  
 Ar yer goz hag ar polizi ;  
 Gant glac'har bras ha poan-spered,  
 E tiredjont d'an em glevet.

« Petra d'ober ? Pelec'h monet,  
 Ma ve 'n ivinen diskaret ?  
 A rum da rum, a ras da ras,  
 E kludemp en ivinen vras :  
 Ma ve zellet ouz al lezen,  
 Aboue pell 'zo, ni zo perc'hen.